

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :
R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.
Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h. R/ : Ha get ho spered !

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : **ho pet truez doc'homp ! (2 wezh)**
Roit deomp ar peoc'h !

Kent ar gomunion :

Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an Hini a lam pec'hed ar bed :
Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.

R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.

Komunion : Er groaz, un Doue en deus vennet : O madelezh hep par !

Mervel aveit salviñ ar bed : Kanit, pobl ag an douar !

D'ar Groaz Santel, Kristenion,

Kanomp gloar ha melasion !

Kanomp, kanomp, kanomp a galon !

Er groaz, dre e wad presius : O madelezh hep par !

En deus hur prenet, tud kablus : Kanit, pobl ag an douar !

Get ar groaz en deus Roue an Neañv : O madelezh hep par !

Diskaret rouantelezh Satan : Kanit, pobl ag an douar !

Er groaz emañ hon esperañs : O madelezh hep par !

Er groaz emañ hor c'hoñfortañs : Kanit, pobl ag an douar !

Enni e wel an dud santel : O madelezh hep par !

Gwir hent ar joaioù peurbadel ! Kanit, pobl ag an douar !

D'an holl e lâr : Karit un Doue : O madelezh hep par !

Marvet 'veidoc'h dre garantez : Kanit, pobl ag an douar !

Veit kloziñ an oberenn

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered !**

Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :
An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. **R/ : Amen !**

Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver : **R/ : Bennozh da Zoue !**

Kan-dibenn : Itron santez Anna, gouarnit ho Pretoned,

Goulennit dreist pep tra ma vint fidel bepred.

1 Avedomp pezh ur gloar ha pezh ul levez, Mend eo daet d'hor c'hemer aveit he bugale.

2 Avedomp-ni emañ he c'harantez vrasañ ;

Avedomp-ni e roa he burzhedoù kaerañ.

Parrez Ker Anna

22^{vet} Sul ordinal

Degemer Damian Guilloù

3 a viz Gwenholon 2023

Kan digor :

Tremenet eo an noz, splanniñ a ra an deiz,
Me 'glev holl an evned é kaniñ gloar da Zoue ;
Sevel a ran mam bouezh get hini an evned.

'Veit kaniñ en enor da Zoue, Kroueour ar bed.

C'hwi hoc'h eus a netra ma zennet, o man Doue !

Etre ho torn emañ ma marv ha mam buhez,

Ha rak-se e roan deoc'h an deiz a gomañsan ;

En imple 'veit ho kloar a-bezh-kaer e vennan.

Plijet geneoc'h àrnon evezhiat e pep eur

Ha pellaat azoc'hon, en deiz-mañ, pep dañjer ;

Dreist pep tra, o ma Zad a zo e lein an neañv,

Doc'h velim ar pec'hed, gwarantit ma eneañ.

C'hwi a wel an dober am eus ag ho sekour,

Roit enta ho pennozh d'am foan ha d'am labour

D'am c'horf ha d'am eneañ, roit hiniv o bevañs,

Ha be(zi)t C'hwi-mem un deiz en neañv ma c'hoñfortañs.

Salud d'ar bobl :

Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :

Respont : Ha get ho spered !

Kyrie : O Aotrou Doue : ho pet truez !

O Aotrou Krist : ho pet truez !

O Aotrou Doue : ho pet truez !

Gloria : (Guilloù) Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo ! (2 wezh)

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getoñ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek.

Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhel-meurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !!

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr Yeremia.

Ma lorbet ho peus, Aotrou, ya, lorbet on bet deoc'h; kroget ho peus ennon, ha trec'h oc'h bet din ! Danvez da vout goapaet on bet a-hed an deiz, an holl dud ec'h ober bourd genin. Rak, seul gwezh ma komzan e rankan huchal, krial da embann : «Gwaskerezh ha dismantr !» Rak komz an Aotrou a sach àrnon dismegañs ha bourd a-hed an deiz. En em lâret em eus : «Ne rin mui mañsion ebet anezhañ, ha ne gomzin mui en e Anv», met em c'halon e save neuze evel un tan bev ma loske ken ne oan ket evit derc'hel.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Psalm 62 : Sec'hed ac'hanoc'h en deus ma eneañv, Aotrou, man Doue.

Aotrou Doue, ma Doue oc'h-c'hwi,
c'hwi eo a glaskan kentizh ha gouloù-deiz.
Sec'hed ac'hanoc'h en deus ma eneañv,
ha ma c'horfa hirvoud tremazoc'h.

Setu ma sellan doc'hoc'h en ho sanktual,
get esperañs da welet ho kloar hag ho kalloud.
Gwell eo din ho kras evit ar vuhez,
ma muzelloù a c'houlenn ho meuliñ.

Ho pennigiñ a faot din a-hed mam buhez,
ha sevel man daouarn en enor d'hoc'h anv.
Ha ma c'halon he devo he gwalc'h a levenez,
ma genou ho meulo get diweuz é tridal.

Ma skoazellour oc'h bet a-holl viskoazh,
dindan ho tivaskell e tridan get levenez.
Doc'hoc'h en em stag ma enañv,
ho torn dehou ma dalc'h ha ma souten.

Cil lennadenn : Lennadenn tennet a lizher an Abostol Paol d'ar Romaned.

Breuder : Ho pediñ a ran start enta, dre drugarez Doue, d'en em ginnig hoc'h-unan evel ur brofadenn vev, santel ha plijus da Zoue : setu aze an azeulerezh speredel a zle bout ho kani-c'hwi. Ha ned it ket da kemer skouer àr ar bed a-vremañ, met en em stummet en-dro en ur reneveziñ ho spered evit anavet sklaer petra eo boloñtez Doue, ar pezh a zo mat ha plijus dezhañ, ar pezh a zo parfet.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Allelouia : « Tad an Aotrou Jezuz-Krist da sklêrijennañ daoulagad hor c'halon, ma ouezimp pebezh esperañs a zo en e c'halvedigezh. »

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **Ha get ho spered.**

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mazhev.

Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

Aviel : En amzer-se e krogas Jezuz da ziskouez d'e zisiplad e oa ret dezhañ monet da Jeruzalem, gouzañv kalz a-berzh an Henaourion, an Arc'hveleion hag ar Skribed, bout lakaet d'ar marv ha, d'an trivet deiz, dihuniñ a varv da vev. Pier, neuze, goude bout en tennet getañ a-kostez, a stagas d'ober rebrechou dezhañ : «Doue da viret, Aotrou, kement-se n'arrivo ket geneoc'h !» Met Jezuz a zistroas hag a lâras da Bier :

«Kerzhit àr-dreñv, Satan ! Ur skoilh oc'h àr ma hent. Ho soñjoù n'int ket soñjoù Doue, met soñjoù an dud.» Neuze e lâras Jezuz d'e zisiplad : «Mar venn unan bennak donet àr ma lerc'h, dle eo dezhañ en em zistag a zoc'htañ e-unan, dougen e groaz, ha donet da ma heul. Rak an neb a venno gouarn e vuhez he c'hollo ; hag an neb a gollo e vuhez abalamour din he c'havo. Da betra e talv da vab-den gounid ar bed a-bezh, mar deua dezhañ koll e eneañv ? Ha neuze, get petra e c'hello-eñ he freniñ ? Rak Mab an Den a zle donet e gloar e Dad get e Aeled, ha neuze e takoro da beb unan hervez e oberoù. Setu Komz an Aotrou : **Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

Kredo : Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek, Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, deuet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehou an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollvedel : Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Lid ar profoù :

ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel : Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !

Lan eo get ho kloar an ne hag an douar : Hosanna e lein an ne !
Benniget an hani a za e anv Doue : Hosanna e lein an ne !

Gorreou : Degas 'reomp da soñj ag ho marv,
Aotrou Krist savet da vev,
Ha gortoz a reomp ho tistro.

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet,
Ho rouantelezh degaset deomp,
Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel en neañv.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,
Pardonit deomp hor pec'hedoù,
'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,
Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion
Met hon diwallit doc'h an droug.